

- 113 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

42. MAHARID LORANÇ

(follennoù 132 - 133)

Maharid Loranç zo bed tri de deus ar grouk
dre grass Santez Anna nen deus ket bed a drouk.

Eun devez eur c'hloarek o tremen ar potenç :
Benos doue var da c'hene, Maharidig Loranç.

Neket red dit, kloaregik, pedi gant va hene
Me zo ken dispos aman vel ma zout te aze.

Kers allesse, kloaregik, kers allesse d'an noblanç
na da lakat va distaga na dimeus ar potenç.

Pa kano eur c'habon rostet tre ar plad ag ar ber
neuse te vezo kredet kloaregik a geïer.

Pa gano ar c'habon rostet en kreis entre an daou plad
Neuze te vezo kredet kloaregik ar: gaouiat.

Na ne voam ni ket hoas peurechu a leina
hag ar c'habon rostet a kommenç da kana.

Kement se a signifi e lar d'he pot merchossi
Dib dime va inkane ma zin peteck henri.

Deud ganin me, maharid, deud ganeme d'am zi
Me lakeï va c'heghiner da ficha ho dijuni.

Me ne meus ket defot da zebri, ken neubeut da c'heva
Ken a vin bed d'ar folgoët a da santez anna.

Deus ganeme mac'harid, var geïn ma inkane
a me ho kasso d'ar folgoët a da santez anne.

Na din var geïn inkane ken neubeud na zin var droad
var beno va zaoulin noas mar gel va c'halon pad.

Kris a vije ar galon a kris ma na welche
he gweret santez anna an hini a vije

welet ar c'hoad ag ar min bez ho rucha
gant daoulin maharit Loranç o voada

- 114 -

Neb rus e ve ar fumelen e iafe di ie goude.

Kris a vije ar galon a kris ma na welche
bars er goeret ar folgoat an hini a vije

Goelet ar greanigou, nag ive o ruijal
gant daoulin Maharit a voa o voada.

Na pa voa ie erruet e kichen an or vras
echu e va finijen ma vijen bed he gras.

Ar c'hleïer kommanç bralla ne voa den var ho zro
an orojou digeri eb den nag alc'houecho.

—————
VVVVVVVVVVVVVVVV

Louisa Herviou, 8 janvier 1851

—————
VVVVVVVVVVVVVVVVVV